

Ur paotrig bihan a Blouguerne

1. O qu'il fait bon marcher
2. Dansons-nous légère mon ami, sautons-nous légèrement
3. O du vin de vigne, du vin, o du vin de vigne
- 4.

Un paotrig bihan a Blouguerne,  
A oa aet en ur vale

A oa aet da Lezneven,  
Da glask louzoù diouzh ar boan benn

E Lezneven p'oa erruet,  
Na goulenn lojañ en doa graet

Amañ vez lojet den ebet,  
Nemet er gwele ar plac'hed

Ar c'hompliment 'n doa kavet mad,  
E zafen tri 'n er gwelead

En 'tremeniad o tond en ti,  
En aviz blagiñ ha fumiñ

N'a pa z'eus amañ c'hwec'h botez,  
'Tle bezañ ivez teir maouez

Elumit ar goulou ma welin,  
He neuze sur e kompreniñ

Pa oa elumet ar gouloù,  
Oa kavet Saïk etrezo-diou

Me zo bet tomm din en noz-mañ,  
Etre an div femelen-mañ

Etre an div femelen,  
Hag etre div liñsel wenn

Echui a ra va c'hanaouenn,  
Rak ar merc'hed zo leun a c'hwen

Ar c'hwenn, ar merc'hed a zo gwak,  
Pa spegont mat e chomont stag.